

Dornskridoù Milin : Kanaouennoù

16. AR BUGEL PEMP BLOAZ

Nep° en deuz c'hoant da ouela truez °a-us : Ann hini
 et dillun d'ar C'hastel nevez,
 et dillun d'ar C'hastel nevez
 c'houi a ouelo kalz a druez.
 c'houi a welo krouga, leski
 brava plac'hik a vo enn hi,
 c'houi welo krouga Mari Gabiten
 hag he breur kaer enn he c'hichen.
 Ar plac'hik pemp bloa a lare
 d'ann dud a justis eno neuze :
 - Lezit va mamm hep he leski
 me a iel enn tan evit-hi.
 - ho! plac'hik pemp bloa, n'efet ket
 pa n'hoc'h euz ket hen dellezet.
 Ar plac'hik pemp bloa a lare
 toull dor he zad pa zigweze :
 - Va zad, digorit d'inn ann or
 ho merc'h pemp bloa a c'houl digor.
 - Plac'hik pemp bloa, d'in leveret:
 hag ho mamm baour pe leac'h eo eet ?
 - Va mamm zo krouget ha losket
 he ludu enn° avel gwentet. °a-us : gant ann
 -plac'hik, plac'hik, d'in leveret
 petra ann abek e doa gret ?
 - Abalamour d'eur bugel bihan
 e devoa krafunet enn tan .
 - M'he divije din lavaret
 m'em bije 'r bugel anzavet.
 plac'hik pemp bloa, iit alese
 gant aoun ann avel ma trofe.
 Ma teufe 'nn avel diwar Folkoed
 dre doull ann alc'houe vec'h loret.
 ar plac'hik pemp bloa a ouele
 e liorz he zad pa azeze
 - ho! Introun Varia ar Folgoad
 hou man zo din eur galounad:
 krouget va mamm, loret va zad
 e liorz he zad paz eo azezet
 hag eno ni a zo marvet
 eur blantenn warn-hi zo savet.

vvvvv